

YANN XXIII

**KELC'HLIZHER
PACEM IN TERRIS**

Peoc'h war ar bed

Troidigezh gant an Tad TURIAN
Breuriezh Sant Gweltaz

PREDER

Kaier 110

Eost 1968

YANN XXIII

KELC'HLIZHER
PACEM IN TERRIS

Peoc'h war ar bed

Troidigezh gant an Tad TURIAN
Breuriezh Sant Gweltaz

PREDER

Kaier 110

Eost 1968

KELC'HLIZHER

E. S. AR PAB YANN XXIII

d' ar Vreudeur Vriel,
Uheldadoù, Penneskeb, Arc'heskeb,
Eskeb hag Ordinaled arall,
a-ènglev hag a-unvan
gant ar Sez abost-lek,

d' ar gloer
ha da feizidi all
ar bed,

koulz ha d'an holl dud
a youl vat.

A-zivout

PEOC'H AN HOLL VROADOÙ

da vout soliet
war ar WIRIONEZ,
ar REIZHDED,
ar GENGARANTEZ,
hag ar REZID.

Facem in Terris : karta hon gwirioù, hon dieub-
idigezh (kv. M. Glanndour, in Ar Vro, niv. 24).

C'hwec'h vloaz war-lerc'h - hag eñ troet en
darn vrasañ eus yezhoù ar bed - setu al lizher
pabel-mañ e brezhoneg.

Ha me war harzoù an Iliz, dre garantez ouzh
Doue ha Breizh, dre feleunded ouzh kelenn ar Fib-
ion, o tistreiñ e brezhoneg kelc'hlizher Yann 23,
ha deus graet levezeg va c'halon.

" Gwenn o bed oberourion ar peoc'h, rak galvet
e vefont bugale Doue. " (Mzh. 2, 9)

Petra eo ar Peoc'h avat ? N'eo ket eus ar 'pax
romana' ez eus anv amañ. Evit lod a zo, ez eo ken-
emglev na mui na maes (va c'heneil zo 'den va
feoc'h' - kv. Ps. 41, 10). A zo gwir, eme sant
Tomaz Akwino, hogen ne spir ket a-walc'h. Amañ eo
kounaat termenadur sant Eostin : ar peoc'h zo sed-
erni an urzh pe, gwelloc'h, ar bezañ seder, diogel
ha hezek diwar doujañ an urzh soliet en natur gant
ar C'hrouer. Sol ar peoc'h zo an urzh en den koulz
hag etre an dud - ha dre-se etre ar broadoù.

Ar peoc'h zo hoal-vat ar vuhez pemdeziek, stad
an den o kendonianñ gant an natur, gantañ e-unan
gant e hentez, gant Doue. Ar peoc'h zo sammad ar
madoù deroet gant ar geveued.

Mennoz kristen ar peoc'h n'eo ket ur braoued,
n'eo ket ar pareer prim ha brav da zrougoù ar bed
ma vev ar gristenion. Un egin eo kentoc'h hag
eñ o c'hoantaat fonnañ da bep remzi. Ar peoc'h,
evit an Iliz, n'eo ket enebad sterel da arwell pe
brezel. Deltuek eo peoc'h ar gristeniezh, hag eñ
emgej kalonek ha karantek an dud a youl vate sell

kenober davit kenvad an holl.

Davit mad an hinienn, mad an tiegezh, mad ar stroll, mad pep bro, mad ar bed kevan - hep ankou-azh mad ar bihanniveroù : sed ar striv a zo dlead pep kristen.

" Holl labour an Daspren zo davit sederni ha peoc'h - evel ma oa pep tra er penn kentañ. " (Newman, Parrochial and Plain Sermons, III, 364)

Breur TURIIV.

BONLAVAR

An urzh er bed

1 Ar peoc'h war ar bed, bet an holl dud e pep amzer o c'hoantaat dezhañ, ne c'hell kavout sol na diazez, anez d'an urzh savelet gant Doue bout doujet groñs

2 Diwar enraog ar skiantoù ha kavadennoù ar c'halvezerezh, ez anad dimp ez eus un nerzh espar o ren war ar boudoù bev ha war nerzhoù an natur a zo dreistelezh an den ken gallout dinoiñ hevelep urzh, ken goveliañ binvioù azas, dezhañ da vestroniañ an nerzhoù-natur ha d'o lakaat en e gorvo.

3 Meurdez divent an Aotrou Doue, krouer ar bed hag an den e-unan, honnezh eo a zo lakaet war-wel gant en-raog ar skiantoù ha kavadennoù ar c'halvezerezh. Eñ en deus krouet ar bed o tispakañ warnañ largetez e furnez hag e vadelezh, liz d'ar Salmour pa lavar: "Aotrou, hon Doue, pegen meur emañ da Anv razh war ar bed¹." - "Stanket an oberoù ac'hanout, ô Zoue, gant furnez int deuet holl diganit²."

Speredek ha rez eo bet krouet mab-den gantañ, diouzh e rizh hag e zrec'h³, hag ar bed lakaet en e vestroni: "E grouet ac'h eus izelloc'hik eget an aslez; gant kened ha sked ac'h eus e c'hronnet. E savetac'h eus dreist da oberoù da zaoarn; pep tra ac'h eus lak- aet dindan e dreid⁴."

An urzh gant mab-den

4 Enebek, un doan, eo urzh peurvat ar bed diouzh an

8 dizurzh a vez etre an hiniennoù hag ar pobladoù, evel pa ve d'an nerzh nemetañ reizhañ o darempredoù.

5 An urzh avat zo bet siellet gant Oberour ar bed e kreiz kreizon mab-den, ha hi diskuliet en o c'henskiant a c'hourc'hemenn dezhañ he doujañ. "Diskouez a reont, louc'het en o c'halon, gwered al lezenn, hag o c'henskiant a zegas dezhe he zesteni⁵."

Penaos e c'hellfe bout a-hend-all pa'z eo melezour-et furnez didermen Doue en E holl oberoù ha seul anatoc'h ma'z int perveshoc'h e skeul ar boudoù⁶

6 Ur c'hamveiz a vez a-lies e spered an dud o krediñ e c'hell an darempredoù etre an hiniennoù hag o riez bezañ reoliet diouzh ar saveleñnoù kevelep gant re an nerzhoù hag an elfennoù neppoell dre ar bed. Disheñvel eo evit anien ar reizhennoù o ren an dud, a zo da gavout el lec'h ma'z int bet skrivet gant Doue, eleze e natur mab-den.

7 Hevelep reizhennoù a vez o luskañ an dud en o darempredoù, ken an eil re gant ar re all er gedvuhez, ken etre keodedourion ha pennadurezhioù er riezoù, ken etre ar riezoù an eil re gant ar re all, ken etre ar re-se hag ar gumuniezh-ved a c'houlenner groñs ar savidigezh anezhi hiziv an deiz evit keal kenvad an hollved.

I

AN URZH ETRE AN DUD

8 Kentañ eo komz diwar-benn an urzh a zo dleet da vezañ etre an dud.

9 Ur gedvuhez urzhiet reizh ha spletus a gav he sol e pennaenn an den kantvezet evel hinienn. eleze evel un anien dezhi reizh ha rezid-menn. Setu perak ez eus gantañ gwirioù ha dleadoù an eil re o vont diouzh ar re

all, war-eeun ha war un dro eus e c'henezh; dre-se ez int hollel, disgwallus, ha dilamedus⁷.

10 Mar kantvezet briagezh an den diouzh ar gwirionezoù diskuliet gant Doue, e rankomp ober brasoc'h stadc'hoazh anezhi. Rak dasprenet eo an dud gant gwad Jezus Kr ist, gant ar c'hraes ez int graet bugale ha karidi da Zoue ha lakaet eo ar c'hlod peurbad en o hârezh.

Gwirioù mab-den: ar gwir d'ar vuhez

11 Ar gwir en deus mab-den da gaout buhez, kevanroez - korf hag araezioù kevazas ouzh ur barr-bevañ dereat, e - sigur bevañs, dilhad, annez, diskuizh, mezekadur ha kedskor pergen. Rak-se emañ en e wir bezañ skoret ervat ken ouzh kleñved, ken ouzh mac'haga, ken ouzh intañved, ken ouzh kozhni, ken ouzh dic'hwel. ha seul gwezh evit gwir ma vez o tioueriñ an dafar-bevañ diwar c'hoarvoudoù'int ket en e giriegezh⁸.

Ar gwir d'an talvoudoù divezel ha stuzegal

12 Mab-den zo dleet outañ bri, brud-mat, pep frankiz da glask ar wirionez, da ezteurel e vennozioù ha d'o skignañ, da grouiñ diouzh forzh pe arz, gant ma vo doujet d'an urzh divezel ha d'ar c'henvad; ar gwir en deus ivez da vezañ stlennet ent ergorek.

13 En e wir naturel eo c'hoazh diorren e zeskadurezh ha dre-se diraez ur stummadur diazev hag ur c'helenn kalvezel e-keñver micher diouzh stadgezh e vroad. Strivañ zo d'ober evit ma c'hellon an dud tizhout betek derezioù uhelañ ar studi, diouzh o donezonoù, dezhe da gavout er gedvuhez gourc'hwelioù hag atebegzhioù kevazas ouzh o barregezh hag o gouiziegezh⁹.

Ar gwir da gehelañ Doue

14 Pep hini en deus ar gwir da gehelañ Doue e reizh ouzh e askre ha da bleustrin e gravez en e vuhez prev-ez ha foran. Splann ez eo termenet gant Lactantius : "Ganet omp er bed-mañ evit dougen da Zoue hon C'hrouer ar bri dleet outañ, evit E anaout eñ hepken, ha na heuliañ nemetañ. Gant hevelep doujañs dleet ez omp li-amm et hag ereet ouzh Doue evel mibion; diwar-henn emañ hec'h anv d'ar 'religion'¹⁰." Eno e lavare hon Diaraoger Leo 13, divarvel an eñvor anezhañ: "Frankiz wirion honnezh, o tereout ouzh bugale Doue hag o wareziñ ervat bri mab-den; rak-se emañ dreist da bep drougoni ha direizhder; a-viskoazh ez eo bet e kelenn hag e preder an Iliz. Atav ez eo bet goulennet gant an eb-estel; gwirielaet eo bet gant an apologourion en o skridoù; arouestlet eo bet dre o gwad gant ar verzhherion a-vostadoù."¹¹

Ar gwir da zibab e stad-vuhez

15 Dibab e pep frankiz e stad-vuhez zo e gwir pep den koulz da sevel tiegezh gant kevatalder gwirioù ha dle-adoù ennañ etre gour ha gwreg, koulz da vont da veleg pe da vanac'h¹².

16 An tiegezh, hag eñ soliet war an eured rez-kevrat-et, unvan ha didorrus, zo ret e gantvout evel kell gentañ ha naturel ar gevredigezh. Rak-se eo urzhiadur-añ an armerzh, ar gevredigezh, an deskadurezh hag an divezegezh diouzh kadarnaat savelekted an tiegezh ha gwellaat dezhañ seveniñ e gefridi.

17 Ar gerent da gentañ-penn o deus ar gwir da vagaan ha da ziorren o bugale.

Ar gwir en e labour hag er gevredigezh

18 Pep den zo en e wir da gaout gourc'hwel ha frankiz en e labour¹⁴.

19 Gant seurt gwirioù ez eus ivez ar gwir da ampleg-adoù labour e reizh ouzh ar yec'hed hag an divezegezh, hag o tiogelañ stummadur reol ar yacuankiz; hag, evit a sell ar merc'hed, ar gwir da amplegadoù labour e reizh ouzh rediennoù o rev hag ouzh o dleadoù pa'z int priedoù ha mammoù¹⁵.

20 Diouzh bri mab-den ez eo c'hoazh ar gwir da embr-eger amrealoù armerzhel, atebegzh pep hini o vezañ miret reol.¹⁶

Ac'hane emañ ar gwir d'ar gwezhour - ha dav eo pouezañ warnañ - da gaout ur gopr savelet gant reizh; hervez barregezhioù ar gourc'hwelour, e rank hevelep gopr reiñ d'ar gwezhour ha d'e diegezh ur barr-bevañ kevazas ouzh bri an den. Evel ma lavare hon Diaraogour Pius 12: "Diouzh lezenn al labour, merket en natur, emañ ar gwir ken natur-all d'an den, da c'hounit diwar e obererezh peadra da vevañ evitañ hag evit e vugale; ken start eo reizhet an natur da wareziñ an den"¹⁷.

21 Diouzh natur an den ez eo c'hoazh ar gwir d' ar berc'hentiezh prevez ken war c'hlead ken war araeziou-kenderc'hañ. Evel kelennet ganimp c'hoazh ez eo hevel-ep gwir o wareziñ gant gwerc'h bri an den hag ouzh e skorañ e pep frankiz en e holl atebegzhioù, o stabil-aat ivez unvan ha didur mud pep tiegezh, pezh zo war well evit peoc'h ha finbortez ar gevredigezh¹⁸.

22 N'eo ket aner ouzhpenn degas da goun en deus ar berc'hentiezh prevez ur roll diouti er gevredigezh¹⁹.

Ar gwir d'envodañ ha d'emezeliñ

- 12 23 Diouzh m'emañ mab-den kedvuzhus dre natur en deus ivez ar gwir d'envodañ ha d'emezeliñ, ar gwir da reiñ d'e gevreadoù ar frammoù o tereout war vat d'o falioù, hag ar gwir-frankiz da gemer atebegzh diouzh tizhout hevelep palioù²⁰.
- 24 Evel m'hon eus kemennet groñs e Mater et Magistra, sevel niver a gevreadoù pe a gorfoù-etre barrek d'ober diouzh palioù seurt na c'hell ket an den diraez drezañ e-unan, zo da vezañ kantvezet evel un hent diziouerus evit rezid hag atebegzh mab-den²¹.

Ar gwir da annezañ ha da zivroañ

- 25 Pep den en deus ar gwir da annezañ ha da ziannezañ e pep frankiz e diabarzh e riez; en e wir ivez eo da vont d'an estrenvro ha d'ober annez eno, diwar abegoù reizh²². Goude da unan bennak bout keodedour en ur vro, ez eo bepred ezel eus tilu an denezelzh, keodedour eus ar gumuniezh-ved o vodañ hag o kedunaniñ an holl.

Gwirioù er vuhez foran

- 26 Ouzh bri mab-den ez eo stag ar gwir da vezañ perzh- iadek en amrealoù foran ha da genober evit ar c'henvad "Pell a vezañ ergorad hag elfenn c'houzañvat er ged- vuhez, emañ an den, evel m'emañ, da vout ar pezh ez eo hag e rank bezañ, eleze gourzhergor, sol ha finvez enni²³.
- 27 Ur gwir all d'an den eo ar gwarezadur dezvel, gwerc'hek, kengevatal ha reizhwiriek. "An urzh lezenn- el, mennet gant Doue, e tinaou diouti ar gwir hollbad d'an den o vastañ da bep hini diogelroez dezvel hag ur steudad gwirioù fetis, berzet ouzh pep gwall amreol²⁴."

An dleadoù: keñver ar gwirioù hag an dleadoù

- 28 Betek amañ hon eus degaset da goun un heuliad gwirioù naturel. Gant an den, renad dezhe, ez int ere- et ouzh kemend-all a zleadoù. Pe derenet pe rediet e vent gant al lezenn-natur, e tennont eus homañ o andon o dalc'hegezh hag o nerzh divrall.
- 29 Kement rak-se, oc'h arverañ skouerioù, diouzh ar gwir d'ar vuhez emañ an dlead d'ur vuhezegzh vriek, diouzh ar gwir da glask ar wirionez e pep frankiz emañ an dlead da zonaat ha da frankant bepred hevelep imb- ourc'h.
- 30 Er gedvuhez, diouzh pep gwir naturel o vezañ gant unan bennak emañ gant ar re all un dlead da anzav ha da zoujañ hevelep gwir. Peogwir kement gwir denel nat- urel a zo a denn e nerzh groñs diouzh al lezenn- natur ha hi o teren pe o rediñ un dlead kevelep. Nep piv bennak oc'h arc'hañ e wirioù en ur ankouaat e zleadoù, pe oc'h ober gwall-forzh dioute, zo en arvar da ziskar gant un dorn ar pezh a vez savet gant egile.
- Kedvuhez e-sell d'ar c'henvad
- 31 Hag int kenvevat dre anien, e rank an dud kedvuh- ezañ ha klask an eil re mad ar re all. Anzav ha seven- iñ gwirioù ha dleadoù keveskemm zo kevampleged gant emglev ur yoc'h tud. Pep hini a rank ouzhpenn kenober a-youl-vat a-benn prientiñ ur genurzh o wellaat bepred d'ar gwirioù ha d'an dleadoù.
- 32 Neuze ne spir ket d'an den e ve anzavet ha doujet e wir d'an dafar-bevañ, ken na vez skoret - par ma c'heller - da vastañ e walc'h dezhañ.
- 33 Muioc'h eget degas kenurzh he deus ar gevredigezh d'ober; reiñ spletusteroù d'hec'h izili zo en he dle-

ad ivez. E kevampleg emañ anzav ha doujañ d'ar gwirioù ha d'an dleadoù gant kenober an holl war an amrealoù liesseurt lakaet bezus, hetus pe redius hervez ar stuagezh a-vremañ.

Atebegezh ha reziù er gedvuhez

34 Bri mab-den a ampleg ma rafe pep hini gant e intrudu emskiantek hag e rezid. Er gedvuhez, diouzh embragusted an unan e vo doujañ ar gwirioù, seveniñ an dleadoù, ha kenober war amrealoù niverus. Da bep den e vo ober diouzh e rat, diouzh e intrudu ha gant skiant an atebegzh, ha neket dre heg pe dre redi eus an diavaez. Ur gevredigezh soliet war amplegadoù nerzh hepken a vije dizenek, ha hi o voustrañ war rezid an dud, e-lec'h o harpañ hag o luskañ davit gwellaat ha diorren.

Kedvuhez er wirionez, er reizhdad, er garantez, er rezid

35 Ur gevredigezh neuze, eviti da vezañ frammet-mat, spletus ha doujus ouzh an den, a rank kaout ar wirionez da sol, gouez d'an abostol Paol: "Pellait diouzhoc'h ar gaouerezh, lavarit ar wirionez pep hini d'e nesañ, pa'z omp izili an eil d'egile.²⁵" Setu perak e rank ar gwirioù hag an dleadoù keveskemm bezañ gwiranzavet. Diwar reizhdad ouzhpenn emañ hevelep kevredigezh da vezañ, o toujañ ent werc'hek ar gwirioù hag o seveniñ ent leal an dleadoù; gant ar garantez e tle bezañ bevaet, dre un emzoug-ene o tegemer warnor ezhommoù an hentez, o reiñ dezhañ perzh en e vadoù, hag o klask gwellaat da geveskemm an talvoudoù speredel. A zo muioc'h, er rezid emañ ur gevredigezh da vezañ, eleze en doare a zere ouzh tud poellek, dezhe kiriegezh eus o

greadoù.

36 Breudeur Vriel ha Mibion Garet, emañ ar gedvuhez da vezañ kantvezet evel ur gwirvoud speredel hepken, pa'z eo end-eeun keveskemm ar gouiziadurioù ouzh goulou ar wirionez, arver ar gwirioù ha seveniñ an dleadoù imbroud arglask ar mad divezel. Kenvourrusted gant ar gened en he holl diavaezadurioù dereat, c'hoant kendalc'hel da genlodennañ gant ar re all ar pep gwellañ eus an unan ha da genyouliñ gwellaat padus ar ouiziadurezh. Seurt talvoudoù eo ar re a rank bevaat ha durc'haat pep tra: diorreadurezh, armerzh, kevazhel-ezh, strolladegzh ha renadegzh politikel, dezverezh ha kement stuz d'ar gedvuhez en he c'hendro dizehan.

Doue, andon ergorel d'an urzh divezel

37 Speredel dre anien eo an urzh o tereout ouzh ar c'hevredigezhioù-tud. Un urzh eo o soliañ war ar wirionez, o c'hoarvezout er reizhdad, o c'houlenn bevañs digant ar garantez hag o tiraez er rezid ur c'hempouez dalc'hmat davit e reizh ha bepred d'enskoc'h.

38 Hevelep urzh divezel, hollel, peurglok ha digemm en he fennaennoù, zo hec'h andon ergorel en Doue gwirion trehontus ha hiniennel, Pennwir ha Peurvad, donañ mammenn a vevusted evit ur gevredigezh heframmet, frouezhus ha kevazas ouzh bri an dud ouzh hec'h ober²⁶. "Youl an den ha deus he madelezh da reizhenn, ha poell mab-den da vent; hemañ o tennañ e veli diouzh al lezenn beurbadel a zo Poell Doue. Anat eo neuze emañ madelezh ar youl-den muioc'h diouzh al lezenn beurbad eget diouzh poell mab-den²⁷.

Anadennoù hon oadvezh

- 39 Azonet eo hon oadvezh gant teir anadenn.
- 40 Kentañ penn, e welomp ar wezhourion o tiraez o gwirioù armerzhel ha kevarzhel. Strivet o deusde archañ o gwirioù armerzhel ha kevarzhel pergen; aet int pelloc'h goude war an dachenn bolitikel; hag erziwezh o deus arc'het ar gwir da berzhiañ e madoù ar stuzeg-ezh en doareoù dereat. Hiziv an deiz en ogweler e pep bro o c'houlenn groñs bezañ sellet neket evel boudoù diboell ha direzid, meveliet gant reoù all hervez o froudenn, hogen evel tud e pep parzh eus ar gedvuhez: armerzh, kevredigezh, stuzegzh ha politikerezh.
- 41 D'an eil, e c'hellomp gwelout emell ar merc'hed er gedvuhez, deuet primoc'h emichañs e-metou ar pobladoù kristen o sevenadur; gorrekoc'h avat, hag eñ war ziorren bepred, gant pobladoù diforc'h o hengoun hag o sevenadur. Ar merc'h, dre gemer brasoc'h emskiant eus o briedegzh-den, n'houlont ket ken bezañ lakaet da vinvioù; emaint oc'h arc'hañ bezañ sellet evel tud ken er gêr ken er vuhez foran.
- 42 Erziwezh, e tiskouez an denelezh ur frammadur kevredigezhel ha politikel aet war-raok diouzh a oa n'eus ket keit-se. Ne vo mui pobladoù - renidi ha ren-erion: emañ an holl genelioù war ziorren pe o vont da ziorren kumuniezhoù politikel dizalc'h.
- 43 An dud e pep bro hag e pep kevandir zo a - vremañ keodedourion ur Stad emren ha dishual pe darev da vezañ. N'houl den ebet ken bezañ sujet d'ur veli renadel estren d'e gumuniezh pe d'e genel. Kalz anezhe a weler o koll santad an tru a oa o ren kantvedoù ha milvedoù zo. Gant reoù all e vez o tanavaat pe war steuziañ santad o trec'hour, hag eñ ganet eus brientoù kevred -

igezhel, pe revel pe politikel.

- 44 Kevatalder naturel an holl zo aet war-raok e speredoù an dud. Rak-se, diouzh damkeniezh ac'hoel, n'eus nep arguzenn a-du gant hanbarzh ar gouennoù. Setu ur gammed vat graet war an hent o kas d'ar gumuniezh holl-zenel soliet war ar pennaennoù hon eus ezrevellet. Ha neuze pa vez an den oc'h emskiantañ ouzh e wirioù, e tinod emañ ivez emskiant an dleadoù keveskemm. E wirioù dezhañ zo, da gentañ razh, eztaoladennoù e vriedegzh, dezhañ d'o dedalvoud; dlead an hentez zo anzav ha doujañ d'e wirioù..
- 45 Ar gedvuhez o vezañ savelet diouzh gwirioù ha dleadoù, e teu d'an dud intent an talvoudoù speredel ha meizout ar wirionez, ar reizhded, ar gengarantez hag ar rezid evel m'emaint; emskiantañ a reont ez int izili eus hevelep kevredigezh. A zo muioc'h: tuet int gwelloc'h a-se da anaout ar gwir Doue trehontus ha hiniennel. Eno e vezont o darempredoù gant Doue evel sol d'o buhez, d'ar vuhez diabarzh a vevont en o ene, koulz ha d'ar vuhez a genrenont gant an dud all.

I I

AR GUMUNIEZH POLITIKEL

An sotrouniezh

- 46 D'ar gedvuhez ne vije nag urzh na fonned pa ne vije levierion engwisket ent dezvel o tiwall an ensavadurioù hag o strivañ a-walc'h d'ar c'henvad. Digant Doue emañ razh o beli, liz da sant Paol pa lavar: n'eus galloud ebet na ve digant Doue²⁸. Hag evel ma kentel sant Yann Krisostomos war-lerc'h an abostol: " Petra venn deoc'h? E vije amaezhiet pep levier gant Doue? N'eo ket se a gelemnan, eme Paol; n'eo p... hin-

iennoù o leviañ e komzan-me, hogen eus o leuriadur end eeun. Bez' ez eus beliegezhioù, levierion, levidi, ha ne ve ket kement-se dre zargouezh, setu a lavaran a zo diwar Furnez Doue²⁹. "Gant gerioù all, peogwir en deus Doue krouet mab-den kenvevat dre anien peogwir ivez ne c'hell kevredigezh ebet "padour anez d'ul lev gwerc'h-ek hag unanaus e striv oc'h enluañ an holl davit an hevelep palioù; rak-se he deus pep kumuniezh da gaout un aotrouniezh da ren warni. Homañ koulz hag ar gevr-edigezh, a zeu digant an natur ha dre-se digant Doue e-unan³⁰."

47 Kement rak-se, n'eo ket dizalc'h ar veli diouzh pep lezenn. C'hoarvezout a ra dres eus ar galloud da c'hourc'hemenn diouzh ar skiant reizh. A-neuze emañ an nerzh endalc'hus digant an urzh divezel, a zo digant Doue, hec'h andon hag he finvez. "Urzh peurvat an dud vev, koulz ha finvez an den e-unan - an den rez, dalc'het gant gwirioù ha dleadoù disgwallus, hag eñ andon ha finvez ar gevredigezh - en deus ivez da well-out gant ar Geoded evel kumuniezh ret ha beliek; anez da homañ ne ve nep buhez evit ar stroll... Hervez ar skiant reizh hag ar feiz kristen pergen, e tenn hevel-ep urzh hollvedel hec'h andon eus Doue, boud hiniennel ha krouer dimp holl; gant-se galloud al levierion zo un doare perzhiañ e galloud Doue e-unan³¹."

48 Koulz all, mar bez diazezet ar galloud war ar gourdrour pe war an aon rak ar c'hastiz, pe war ouestl ar c'hoprédigezh, n'eo tamm ebet e tro da genilañ ar-glask ar c'henvad; hag e teufe dezhañ henn ober, e ve a-gontrol da vri mab-den a zo diwar rezid ha poellag-egh. Nerzh divezek eo an aotrouniezh da bennañ-holl. He ferzhiaded a rank, kent pep tra, ober diouzh o c'henskiant, diouzh an dlead a zo da bep hini strivañ war

well d'ar c'henvad. Kevatal dre vri-natur eo an holl; neuze ne c'hell nep den rediañ un all en e askre; Doue nemetañ zo evit henn gallout, hag eñ hepken oc'h imbourc'h hag o varn mennadoù kuzh ar c'hreizion.

49 An aotrouniezh denel ne c'hell neuze liammañ-kenskiant nep hini, nemet e ve he mestroniezh ereet ouzh aotrouniezh Doue hag o perzhiañ enni³².

50 En doare-se e vez gwarezet bri ar geodedourion, rak o sentiñ ouzh al levierion n'eo ket sentiñ oute evel tud an hini a reont, hogen doujañ da Zoue, Oberour ha Ragevezh pep tra, en deus renket darempredoù an dud diouzh an Urzh savelet gantañ. N'eo ket emiz-elaat a reomp o tougen bri da Zoue evel dleet dezhañ; en eskemm, ez emuhelaomp hag emvonesamp, peogwir eo bezañ o ren eo ober gwazoniezh da Zoue³³.

51 An aotrouniezh, ha hi ampleget gant an urzh div-ezel, a zinaou eus Doue. Pa vez al levierion o tezvañ pe oc'h urzhiañ a-c'hourzhenep d'an urzh divezel, ha dre-se a-enep da youl Doue, ne c'hell nep askre bezañ endalc'het gante, peogwir "e tleer sentiñ ouzh Doue kentoc'h eget ouzh an dud³⁴". A zo muioc'h en hevelep degouezh, ez eo divezañ d'hec'h aotrouniezh hec'h-unan an hini a ra hag hi o vont da vac'homerezh. "An dezvadurezh denel a dalvez da lezenn keit ha ma vez azas ouzh ar skiant reizh; neuze ez eo anat e talvez diouzh al lezenn beurbadel. Hogen, mar tro diwar ar skiant reizh, e vez graet anezhi lezenn direizh: n'eus mui ganti azon al lezenn ha hi kentoc'h un drougoni³⁵."

52 Padal, n'eo ket peogwir e tinaou eus aotrouniezh Doue hec'h-unan, n'o defe ket an dud galloud da zil-enn o levierion, da ziferañ stumm ar Stad pe da lak-aat reolennoù ha reizhennoù war embregerezh an aotrouniezh. Diwar-henn ez eo ar c'helenn a zo ganimp

azas ouzh forzh pe renad gwerinel e gwirionez³⁶.

Ar c'henvad

53 Evit ar c'henvad ez eo endalc'het an holl dud hag an holl gorfob-etre da strivañ, pep hini en e barzh. E kenglot gant hemañ e tleont klask o mad dezhe ha durc'haat o danvez hag o gwazerezh ouzh ar pezh a vez kemennet gant al levierion, hervez reolennoù ar reizhded ha diouzh stummoù ha bonnoù o barregezh. Reizh ha divezek dreze o-unan pe durc'haat d'ar mad e bezañ ar greadoù gourc'hemennet gant an Aotrouniezh.

54 Al levieriezh o vezañ displeet ma n'emañ ket tuet d'ar c'henvad, e rank an disentezioù kemeret gant al leuriaded bezañ doujus ouzh gwir natur hemañ hag azas ouzh saviad an ampoent³⁷.

55 Dibarderioù ar gouennoù o tiforc'hañ pep kenel zo liammet ouzh ar c'henvad, daoust ma n'eo ket a-walc'h evit termenañ hemañ. Entkelennel en e arvezioù pennañ ha donañ ne c'hell ket bezañ termenet, nag ent istorek nemet e -keñver ouzh an den, pa'z eus anezhañ un elfenn daveel ouzh natur mab-den³⁹.

56 Diouzh m'emañ natur hevelep mad, ez eo ret ivez da bep keodedour kaout e lod ennañ dindan modelezhioù liesseurt, hervez e garg, e zellid hag e zere. Rak-se e tle al levierion strivañ evit mad an holl, hep tamm lelligouriezh ouzh nep hini pe ouzh nep rumm. Evel-henn e lavare hon Diaraogour Leo 13: "Arabab darbenn e nep stumm e kretafe an aotrouniezh foran korvo unan pe darn hepken, pa'z eo ensavet evit kenvad

an holl⁴⁰." Dre zamant ouzh ar reizhded hag ar wirionded avat, e c'hell a-wezhioù atebeion ar Stad ober brasoc'h preder war-dro keodedourion wanoc'h, divarr-ekoc'h da ziwall o gwirioù hag o lazou seunan⁴¹.

57 Amañ eo dimp tennañ meiz hon Mibion e-sigur m'emañ ar c'henvad o sellout mab-den en e bezh, ganteshommoù e gorf ha reoù e ene. Termenet evel-se, ar c'henvad a c'houlenn ur politikerezh dereadek, doujus evit urzhaz an talvoudoù, bastadus e pep reizh d'ar c'horf ha d'an ene eus an araezioù a zere oute⁴².

58 Hevelep pennaennoù eo ar re hon eus kelennet en hon lizher-meur Mater et Magistra pa lavaremp emañ ar c'henvad "o vriata holl ampegadoù ar gedvuhez ma c'hell an den dreze diraez e bervezhted gwelloc'h hag aesoc'h a-se⁴³".

59 An den o vout gant ur c'horf hag un ene divarvel, ne c'hell ket e-doug e vuhez varvel a-izel, reiñ a-walc'h e holl c'houlennoù d'e natur na diraez an hoal peurvat. Kement rak-se, e tle ar c'henvad bezañ terket diouzh damantiñ da silvidigezh peurbad an dud ha neket noazout outi⁴⁴.

Ar stad hag an den

60 Hervez kredenn hon oadvezh, e c'hoarvez ar c'henvad eus seveniñ gwirioù ha dleadoù mab-den pergen: al levierion neuze zo en o c'harg gwareziñ peurgetket, anzav, doujañ, kengompezañ hag astenn ar gwirioù ha dre-se, reiñ tro da bep den da embreger e zleadoù rak "diwall gwirioù disgwallas mab-den hag ober diouzh ma vo gwevnoc'h d'an unan seveniñ e gefridi dezhañ, aze emañ leuriadegzh pennañ kement galloud-leviañ a zo⁴⁵".

61 Rak-se, mar deu ar galloud foran ha dianzav pe

gwellañ gwirioù mab-den, e fellont war o dlead kefridiek hag, a zo muioc'h, ez eo o diarbennoù diwerc'h ent dezvel⁴⁶.

62 Aze emañ pennañ dlead ar galloud foran da urzhiañ darempredoù reizhel ar geodedourion diouzh ma ne vo ket embreger o gwirioù gant lod lakaat aner pe en arvar gant lod all ha diouzh ma vo sevenet an dleadoù keñverek. Dav dezhe mirout kevanroez ar gwirioù evit an holl hag o daskor mar bezont gwallet⁴⁷.

63 E karg ar galloud foran eo ivez lakaat e breder da grouiñ ur saviad oc'h aesaat da bep hini difenn e wirioù ha seveniñ e zleadoù. Hag hemm gouzout a reomp dre skiant prenet, ma ne reont ket a-striv-kaer war-dro an armerzh, ar gevredigezh hag ar stuzegezh, e sav direizherioù war greskiñ etre ar geodedourion, hiziv an deiz pergen, kement ha ken bihan ma n'o devez nep gwerc'h gwirioù pennañ mab-den ha ma vez nozvet ouzh seveniñ an dleadoù keñverek.

64 Ar galloud foran, na petra 'ta, e rank damantiñ da wellaat d'ar gevredigezh ha d'an armerzh; en o freder e rank bezañ diorren, a-c'hoñvor gant ar c'henderc'h broadel, gwazadurioù retañ evel an hentaveiñ, an dezougen, ar c'hehentiñ, an desaniañ dour-evañ, an annez, ar skor yec'hedel, ar skoliañ, an amplegadoù azas iouzh ar pleustr kalvezel, ar goar. Strivañ a refont da ensevel hentennoù kretañ ouzh darvoudoù reuzius ha kreskidigezh ar c'hargoù tiegezhel en doare ma ne vo gantnep den diouer eus ar pendra ret evit ren ur vuhez dereat. Lakaat a refont o aked da aesaat d'ar wezhourion gouest d'ul labour kavout gourc'hwel diouzh o barregezhioù, bezañ gopret hervez ar reizhder hag ar gwirionder, gallout bezañ atebion en embregerezhioù; en o freder e tle bezañ ivez notren ma vo savet korfoù-etre o wellaat da

aezoni ha da frouezhusted an darempredoù foran; ma c'hello an holl ouzhpenn diraez madoù ar stuzegezh er stumm hag er barr azas.

65 Kenvad an holl a c'houlenn ouzh ar galloud foran ren daou strivad: unan da gempenn ha da wareziñ, hag un all da wellaat en ur zamantiñ d'o c'hempouez reizh.

Tud pe strolloù o kacut dreistelezh e vo da ziw-all na savelfont brientoù diwar o c'harg e diabarzh ar riez; gant ar preder da wareziñ gwirioù an holl ne zle ket dont ur politikerezh o vihanaat pe o ti-c'hallusaat embreger hevelep gwirioù - evekañ dis-lavar e ve! "Un dra zo da badout: obererezh ar Stad war an dachenn armerzhel, pegen lark ha don e c'hell mont betek diraez gwirioù ar gevredigezh, ne c'hell ket freuzañ frankiz amreal an hiniennoù, hogen tusañ dezhi, gant ma vo gwarezet bonwirioù pep hini⁴⁸".

66 Davit seurt kempouez e tle treiñ ar strivoù lies sammet gant ar galloud foran a-benn gwellaat d'ar geodedourion embreger o gwirioù ha lakaat didennoc'h dezhe seveniñ o dleadoù e ne vern pe barzh a'r ged-vuhez.

Ar galloud foran

67 N'eur ket evit termenañ da vat pe framm a ve ar gwellañ da urzhiañ ar galloud foran, na pere an itrikoù azasañ ouzh ar galloud-dezvañ, -erounitha -barn.

68 A-barzh diferañ stumm ur renadur ha modelezhoù e arc'hwel e ranker derec'hel brasañ pouez eus saviad hag istor pep poblad, hag int disheñvel hervez al lec'hioù hag ar mareoù. Kavout a ra dimp evelkent ez eo kevazas ouzh natur mab-den frammerezh politikel ar c'humuniezhoù-tud diazezet war dirannadur ar veli o klotañ gant teir c'hefridi an aotrouniezh

foran. E seurt frammerezh, ez eo diferet diwar am-
 egadoù dezvel kefridiou hag arc'hveloù ar galloudoù
 foran hag ivez an darempredoù etre keodedourion hag o
 levierion, evel-se ez eus gwarez da embreger o gwir-
 ioù ha da seveniñ o dleadoù d'ar re gentañ.

69 Evelkent, evit da hevelep frammerezh dezvel ha
 politikel amplegañ ar spletoù rakvennet, e rank ar
 galloudoù foran en o ober hag en o hentenoù, bezañ
 emskiantek eus stumm ha kemplezhded ar c'hudennoù o
 devez da ziskoulmañ hervez saviad ar vro. Hag ur ret
 eo e rafe pep hini en un doare dereat diouzh e arc'h-
 wel dezhañ. Rak-se ez eo ampleget ma emellfe ar gall-
 oud-dezvañ diwar reolennoù an divezegezh ha bonreizh-
 ennoù ar vroad ha ma empentfent ent ergorek ezhommoù
 ar c'henvad e kendro kendalc'hel ar saviad; ma lakafe
 ar galloud-erounit ar reizh da ren e pep tra, gant
 anaout ervat al lezennoù ha daspouezañ pizh an darv-
 enteziou; ma vreurafe ar galloud-barn gant diuntuegezh
 donek ha ma vanfe didencraus ouzh gwaskerezh ar c'he-
 vrennoù. Ampleget eo ivez gant kenurzh ar geodedour-
 ion kement ha gant hini ar c'horfoù-etre ma vefent
 gwarezet dereat ent dezvel oc'h embreger o gwirioù
 hag o seveniñ o dleadoù, koulz kenetreze, koulz gant
 an amaezhourion⁴⁹.

An urzh dezvel hag ar gedvuhez

70 Un urzh dezvel kevazas ouzh an urzh divezel hag
 ouzh stadegezh ar gumuniezh politikel zo a - dra-sur
 spletus-dreist evit ar c'henvad.

71 En hon mare avat ez eo ken liesstumm, ken kemplezh
 ha ken deltuek ar gedvuhez ma vez skort, hañval a -
 walc'h, an diarbennoù dezvel, goude dezhe bezañ diwar
 ar gwellañ skiant-prenet hag ar furañ ragevezh.

72 Rouestl hag amjestr ar c'hudennoù a sav diouzh
 darempredoù ar brevezidi kenetreze, an hiniennoù pe
 ar c'horfoù-etre gant ar galloud foran, an amaezhioù
 etreze e diabarzh ur Stad, ken ne vez ket kavet dezhe
 un diskoulm peurvat e stern an dezvadoù. Neuze a-barzh
 bezañ feleun ouzh an urzh dezvel savelet (kantvezet
 eviti hec'h unan ha diouzh an awenadur anezhi) ha
 bezañ digor ouzh ezhommoù ar gedvuhez a-benn lakaat
 ar stern dezvel e reizh gant kendro ar saviad ha disk-
 oulmañ war well kudennoù nevez dalc'hmat, e rank al
 levierion gouzout anat kefridi ha domani o c'harg; dav
 dezhe kaout kempoell, divezegezh, intrudu ha skiant
 prenet diouzh meizañ prim hag ent ergorek an degouezh-
 ioù fetis, hag ur youl start da zifraesañ war o disk-
 oulmañ gant gwerc'h⁵⁰.

73 Bezañ e gwir da berzhiañ er vuhez foran zo diouzh
 bri mab-den, goude ma vez modelezhiou hevelep perzh o
 vont gant barr stadek ar gumuniezh ma'z int izili an-
 ezhi ha ma strivont enni.

74 Hevelep galloudezh-emellout a ro tu da vab-den da
 berzhiañ e parzhioù nevez hag ec'hon. Dre c'hallout
 kengejañ hag eskemm aliesoc'h gant o levidi e c'hall-
 ont ivez kompren gwelloc'h ezhommoù ergorel ar c'henv-
 vad; a-du-rall kemm mareadek al leuriaded a zivall o
 mestroniezh diouzh koshentez hag a zaskor dezhi bevder
 e reizh ouzh enraokaat ar gevredigezh.

75 E frammadur dezvel ar c'humuniezhoù politikel en
 deiz a hiziv, e weler da gentañ un tuadur da ziferañ
 gant bommoù fraezh ha berr ur c'harta eus bonwiriou
 mab-den: karta enlakaet er Vonreizh pe o vezañ parzh
 kevaniat anezhi.

76 Da eil, e striver da dermanañ er Bonreizhiou gant
 gerioù dezvek modelezh dilenn al leuriaded foran, o

darempredoù kenetreze, domani o galloud, an hentenoù hag an doareoù o deus da arverañ en o levierzh ⁵¹.

77 Erziwezh, war-bouez kantvout gwirioù ha dleadoù, ez eus da renkañ an darempredoù etre keodedourion ha galloud foran; lakaet eo d'an aotrouniezh evel pennañ kefridi anzav ha doujañ da wirioù ha da zleadoù ar geodedourion, o c'hengompezañ diogel, o difenn hag o diorren.

78 Ne c'heller ket neozh darbenn damkaniezh ur re o lakaet e ve youl an dud nemetken - hinienoù pe strolloù - da vammenn gentañ ha nemeti o c'heneh gwirioù ha dleadoù ar geodedourion hag o tinaouañ he nerzh enderc'hel d'ar Vonreizh hag e aotrouniezh d' ar galloud foran ⁵².

79 Koulskoude an tuedoù emañ paouez dezrevell a ziskouez a-walc'h testeni ez emskiant hon c'hempredidi mui-ouzh-mui eus o briedgezh; rak-se e vezont broudet da berzhiañ el levierzh foran ha da arc'hañ ma vo gwarezet gant an diferadennoù stadel disgwall-usted o gwirioù piaout. Ouzhpenn zo c'hoazh, int a c'houlenn ma vo dileuriet al levierion hervez un argerzh diferet gant al lezennoù ha ma ne embregfont o aotrouniezh nemet e bonnoù ar re-mañ.

I I I

DAREMPREDOU ETRERIEZEL

Gwirioù ha dleadoù

80 Kadarnaat a reomp bremañ ar c'helenn graet lies a wezh gant hon Diaraogourion: ar c'humuniezhoù politikel o deus etreze gwirioù ha dleadoù keveskemm; dav dezhe renkañ o darempredoù e reizh ouzh ar wirionezh hag ar reizhder, ar c'hengred oberiant hag ar rezid.

An hevelep lezenn divezel a vez o ren war vuhez an dud zo da reoliañ an daremprederezh etre ar Stadoù.

81 Anat eo seurt pennaenn pa empennar ne c'hell ket al levierion oc'h ober en anv ha diouzhsplet o c'humuniezhezh dinac'hañ o bri-den; diwar-henn n'eo ket mat dezhe terriñ al lezenn-natur a zo al lezenn divezel.

82 Follezh e ve forzh penaos bout leuriet da ren an traou foran ha dre-se bout rediet da zilezel e vri Ha kargoù barruhel n'eus ket gante peogwir ez int bet kemeret evit gwellañ izili ar gevredigezh en arbenn eus o ferzhioù dreist.

83 Gwellañ zo, diwar an urzh divezel e vez rakgoulnnet un aotrouniezh evit forzh pe gevredigezh; soliet war an urzh-se, ne c'hell an aotrouniezh bezañ embreget enep dezhi, hep mont da goll hec'h unan. An Awen Glan henn kemenn dimp: "Klevit eta, rouanez, ha meizit! Kemerit kentel, bleinerion an engroezioù! Ro-it skouarn, levierion o vourrañ gant bostad ho broadoù! Digant an Aotrou e teu deoc'h ar velli, hag an aotrouniezh digant an Uhel-dreist; gantañ e vo barnet ho kreadoù ha c'hwiliet ho mennadoù ⁵³".

84 Mat eo kounnat erziwezh, e-sigur an daremprederezh etreriezel, emañ an aotrouniezh da vezañ embreget e sell d'ar c'henvad, pa'z eo evit se, kentañ penn, ez eo savet.

85 E-touesk brasañ sturiennoù ar c'henvad emañ endeeun anzav ha doujañ an urzh divezel. "Frammadur urzhiet-mat ar Stadoù zo da vezañ soliet war roc'h sonn ha divrall al lezenn divezel diskuliet gant Oberour al lezenn-natur e-unan ha siellet gantañ e kreiz kreizon mab-den diwar arouezennoù divoulus. Far d'ar c'houlouenn skedusañ, emañ o weleviñ dre he fenna -

ennoù war an hent d'an dud ha d'ar broadoù da vont gantañ. Bezent ambrouget war an arhentoù hag ar c'hemennoù diogel anezhi, rak aon na ve lakaet anar gant ar gorventenn hag ar peñse kement ac'han hag ijin deuet gante evit diazezañ ur framadur nevez⁵⁴!

Darempredoù er wirionez

86 Ar wirionez a zle ren war an daremprederezh etre ar c'humuniezhoù politikel. Ar wirionez avat ez eo berzet dezhi kement stumm hanbarzh ar gouennoù ; hag ez eo ampleget ganti kevatalder dre vri-natur etre ar c'humuniezhoù politikel. En he gwir emañ pep hini da vout, da ziorren, da gaout an araezioù ret evit se, ha da sammañ an atebegedh pennañ war se ; en e reizh e vez pep hini da arc'hañ e wir d'ar brud-mat ha d'an doujañs.

87 Dre skiant-prenet hon eus gwelet e vez diforc'h-où etre an dud, ha reoù a-bouez a-lies, e - sigur gouiziadur, vertuz, barregezh-veziz ha madoù danvezel N'eus gwir ebet, evit kelc, d'ar re ampartañ da c'hounit diwar ar re wanañ; endalc het int, an holl ha pep hini anezhe, gant an dlead hoalusañ da genober evit sevel o dreistelezh keveskemm

88 Kumuniezhoù politikel zo a c'hell zoken bezañ diorreetoc'h eget lod all e-keñver skiantoù, sevenadur ha gwelladur an armerzh. Kement rak-se, ned eo ket o gwir souriñ war broadoù dilañsetoc'h pa'z eo kentoc'h kenwellaat a-vras da ziorreidigezh an holl o deus d'ober.

89 Dreisteloc'h eget lod all dre natur ne c'hell ket an dud bezañ, pa'z eo kevatal o bri dre natur; na kennebeut all ne c'hell ket bezañ digevatalded e-sigur bri-natur etre ar c'humuniezhoù politikel, pep

hini anezhe o vezañ par d'ur c'horf, dezhañ tud da izili. O bri, e stumm pe stumm, eo nesañ tra da gizidigezh ar broadoù, anataet ma'z eo dre an hanez ha ned eo ket a-dro-skañv.

90 Un ampleg all d'ar wirionez eo an ergoregezh seder a zo da vezañ dalc'het en embregadennoù bezusaet gant kavadennoù diwezhañ ar c'halvezerezh o reiñ brasoc'h lank d'ar pobloù d'en em anaout. He barregezhioù-hi e c'hell pep kumuniezhoù o lakaat e goulou; kement seurt doare stlennañ o tivrudañ ent direizh poblad pe poblad e gwall ouzh ar wirionez zo avat, hep mar na marteze da vezañ berzet⁵⁵.

Daremprederezh er reizhdad

91 Diouzh reolennoù ar reizhdad e rank ivez bezañ renet an darempredoù etre ar c'humuniezhoù politikel; gant se ez eo ampleget e ve anzavet ar c'henwirioù hag embreget ar c'hendleodoù keveskemm.

92 Dre m'emañ ar c'humuniezhoù politikel e gwir da vout, da ziorren, da gaout an araezioù ret evit-se, da vezañ mistri war o obererezh, da zifenn o brud-mat hag o bri, ez eo ampleget o deus da wareziñ pep gwir-se ha da verzañ kement gread a c'hellfe nozout oute. En o darempredoù prevez, ne c'hell ket an dud arglask o laz-où-int e gaou d'ar re all; heñveldra ne c'hell ket ar c'humuniezhoù politikel diorren diwar goust ar re all ha dre o mac'homañ. Amañ eo emichañs, menegiñ lavar sant Eostin: "Ar riezoù, dianket ar reizhdad digante, peseurt e vezont nemet forbanniezhoù meur?⁵⁶"

93 Bezus eo hep mar hag evit gwir e c'hoarvez e savfe arvell gant ar c'humuniezhoù politikel e-sigur o lazou; seurt tabut ne c'hell ket disoc'hañ diwar nerzh an armoù, na dre lorb pe touell, met evel ma tere ouzh tud,

diwar em gompren, dre zaspouezañ pizh an devoùoù ha mont davit gwir emglev.

Ar bihanniveroù

- 94 Diwar an 19^{vet} kantved ez eus kresket ha skignet un tamm dre holl er bed an argerzh kenglotaat ar c'humuniezhoù politikel gant ar c'humuniezhoù broadel. Dre lies abeg, n'eur ket bep tro evit kenglotaat an harzoù tiriadel ha gouennel; alese e weler darvoudenn ar bihanniveroù hag ar c'hudennoù tenn o sevel diwarne.
- 95 Amañ e tleomp diferañ fraezh hag anat ez eo kement amreal o skoilhañ buhez ha diorreadur ar bihanniveroù ur gwall grizias ouzh ar reizhded; gwashoc'h c'hoazh pa vez antellet d'o o'has da get.
- 96 Peurazas ouzh ar reizhded avat eo ar striv arberzh ar galloud foran evit erluskañ buhez ar bihanniveroù, e-sigur yezh, sevenadur, hengoun, araezioù hag embregadennoù armerzhel pergen⁵⁷.
- 97 Dav lakaat reizh koulskoude e vez troet ar bihanniveroù, koulz en arbenn eus ar saviad tenn e vez rediet warne, koulz en arbenn eus reuzioù an tremened da z'reizhpriiziañ o dibarderioù; betek o lakaat gwezh-avez dreist da dalvoudoù denel an hollved, evel pa rankfe kenvad an tilu denel menel a-dreñv da lazoù o c'henel. Padal, e ve reizhek dezhe meizañ pegen emsavadus eo o emgav: dre zampredañ bemdez gant tud arallstuz e vrasa d'o speredelezh ha d'o gouiziadurezh o kinnig dezhe piaouañ tamm ha tamm talvoudoù ar metou ma vezont diazezet. Kement-se a zeuy da wir ma vennont kehentiñ ar vuhez, en he stummoù lies, gant hengounioù ha stuzegezhioù disheñvel; neket avat o vegañ broc'hadeg ma sav noazioù diniver diwarnañ ha

skoilh ouzh erluskañ hag ennaog.

Daremprederezh gant kengred

- 98 Diwar wirionez ha reizhded emañ an daremprederezh etreriezel da vezañ; hevelep daremprederezh zo da gas gant kengred gwerc'hek, dindan stummoù lies ar c'henober armerzhel, kedvuhez, stuzegel, yec'hedel ha sportel, hag int bezus ha frouezhus evit hon amzer. War-se, arabat disgwelout ez eo kentañ kefridi natur ar galloud politikel gwareziñ ar c'henvad broadel, hag eñ dirannadus diouzh ar c'henvad hollvedel, ha neket bac'hañ dremmwel an dud war an harzoù tiriadel.
- 99 Neuze ne spir ket d'ar c'humuniezhoù politikel war glask o lazoù na ober gaou ouzh ar re all. Kenstrollañ o steuñvoù hag o danvezioù an hini o deus d'ober, a-benn diraez ar palioù na vent ket oute a-hend-all. Amañ avat ez eo pellaat diouzh kempenn e splet d'ul lod kumuniezhoù o tegas droug da lod all pa'z eo o mad dirvoudel a zo da c'hounit.
- 100 Gant kenvad an holl ez eo ampleget ivez ez erluske pep kumuniez politikel an eskemmerezh a bep seurt gant an hiniannoù koulz ha gant ar c'horfoù-etre. Pa'z eus e meur a rambarzh dre ar bed keneloù mui pe mui disheñvel, e ranker diwall na ve stivet an darempredañ gant tud arallgenel, kement a vije un trevari en hon grez ma'z eo ar pellderioù aet da zister-dra. Goude m'he devez pep kenel he dibarderioù dezhi en he finou, ez eo arabat disgwelout o deus an dud perzhioù boutin d'an holl ma c'hellont bennozh dezhe kengejañ e domani ar madoù speredel ha gwellaat d'o enraokadur. Dav anavez ar gwir hag an dlead o deus da geduniañ gant an holl re all.

Kemblac'h etre douaroù, poblañs ha kevala

32
101 Anat eo ez eus digemblac'h e rannbarzhioù zo etre an douaroù-labour hag ar boblañs, pe c'hoazh etre strujuster an douar hag an araezioù ret outañ. Dav d'an holl pobloù kenlabourat da erluskañ treizhidell ar madoù, ar c'hevalaoù hag an dud⁵⁸.

102 Mall-bras eo, d'hon meno, ez afe ar c'hevala dav-it ar gwezherezh ha neket en amgin. Diwar-henn e vez tro d'ar wezhourion da wellaat o barr-bevañ, hep na ve warne - krisat degouezh - mont da zivavaez-bro ma o defe da eile'hourdonañ ha da voazañ d'ur metou nevez.

Argerzh ar repuidi politikel

103 Awenet gant Doue, e karomp an holl dud evel un tad hag e sellomp gant doan argerzh ar repuidi politikel. Hevelep harluerezh a ra fonn hag a ziwan poanioù glac'harus a bep seurt.

104 Kement-mañ a ziskouez anat e kurz betek re. renadurioù zo war ar rezid a zo bep keodedour en e wir hag en e rezih da gaout evit e vuhez-den; ha c'hoazh ez eus renadurioù o nagenniñ war hevelep gwir d'ar rezid pa n'en dilamont ket zoken. A-vaes-tu d'an urzh kevarzhel eo hevelep dilamañ, pa's eo graet ar galloud foran da seveniñ ar c'henvad, ar sol anezhañ o vezañ diwar anzav domani azas ar rezid ha gwareziñ ar gwirioù dioutañ.

105 Ne vo ket aner degas da goun ez eo ar repud politikel un den gant e vri hag e wirioù a zo da vezañ anzavet dezhañ; n'int ket aet ezwiriek war zigarez ma'z eo didalvoudekaet e vrientoù keodedel pe politikel.

106 E-mesk gwirioù mab-den emañ ivez an hini da vont

33
en ur vro ma kred d'an den e vezo ur barr-bevañ dere-at evitañ hag evit e diegezh. Dleet eo neuze d'al levierion reiñ bod d'an enbroidi hag e reizh gant mad gwirion o fobl reiñ skor d'ar re a vennad englenañ ouzh ar gumuniezh vroadel.

107 Pa gavomp tro end-eeun, e reomp ent kefridiel hon gourc'hemenoù darbennus ha meulus da gement intrudu renet diouzh pennaennoù ar gred kenvreurek hag ar gengarantez kristen evit diboniañ ar re rediet da zivroañ.

108 Amañ e kinnigomp da c'hred an dud poellek an ensavadurioù arbennik oc'h amrealiñ a gement seurt a zo war-dro ur gudenn ken diaes.

An dizarmañ

109 Un doan eo dimp, e-gin, gwelout ar broioù diorre-et o armerzh o deus aveet belladurioù spouronus hag o terc'hel dalbezh d'o avei, divent ar gremm-den hag ar madoù danvezel postet enne. Diwar-henn ar c'hellidoù ponner lakaet war geodedourion ar broioù-se, endra van diskoazell broadoù all e-sigur o armerzh hag o buhez.

110 Brav eo didamall ar belladurioù o lavarout ne c'heller diogelaat ar peoc'h er saviadoù o ren nemet dre gempouezañ an nerzhoù-brezel. Kent-se diwar gresk ar c'halloudezh vellourel tu bennak e rank ar stadoù all gwashaat a-heligenañ d'o strivoù. Hag ur gumuniezh bennak zo binvioù dere'hanel en he c'herz, ez eo dav d'ar re all aveiñ traezoù heñvelseurt, kevatal o galloudezh drastañ.

111 Setu a laka nec'het an dud, dalbezh dindan o aon, engorto eus ar gorventenn euzhus darev da gonnariñ warne. Hag abeg a zo, pa vez atav darev ar belladur-

ioù. Start eo krediñ e ve tud evit sammañ atebegzh al lazhadurioù hag ar gwastadurioù diouzh ar brezel; ha koulskoude n'eur ket evit dic'houzout ar peurbulluc'h e c'hellfe tarzhañ diwar zarvoud pe dre zegouezh lakaomp c'hoazh e tec'hfe an dud diouzh ar bellañ rak aon an euzhusteroù a c'hell genel digant ar belladur arnodel; ma ne vez arsavet d'an arnodennoù derc'hanel graet gant rat da vrezeliañ, e c'heller soñjal en ur spont en heuliadoù gwallarvarus anezhe evit ar vuhez war an douar.

112 Paouezañ gant ar striv d'ar belladurioù, setu a c'hourc'henn dre-se ar reizhded, ar furnez hag an denegzh, pa c'houlenmont digresk kenstur ha kevadek ar velladurezh e meur a vro, berz war an armoù derc'hanel, hag an dizarmañ dereat kedemglevet hag evezhiet ervat. "Koustet a gousto, ez eo dav herzel, eme Pius 12, na zirellfe evit an trede gwezh ar brezel hollvedel war an denelezh, gant ar gwastadurioù armerzhel ha kedvuhez, an dizurzh diboeil ha divezel dioutañ⁵⁹".

113 Bezet diogel d'an holl avat ne c'hell ket ar paouez war ar c'halloudezh vrezel, an digresk eus ar velladurezh ha - gwelloc'h c'hoazh - an dizarmañ groñs dont da vat, anez d'un dizarmañ kevanel o vont tre en eneoù: dav lakaat e youl gant gwirionded hag unaniez da skarzhañ nec'h hag enkreuz ar brezel diouzh ar speredoù. Dav kemañ ar wirienn o lakaat e tisoc'hfe ar peoc'h diwar gemblac'h ar velladurezh ouzh ar bennaenn o stadañ ne c'heller savelañ ar gwir beoc'h nemet diwar genfizianañs. Sed aze ur pal a c'hell bezañ diraezet, hañval ganimp, p'emañ kongoulenet gant ar poell hag ar furnez, hag eñ meurbet ampledus.

114 Mennet gant ar poell eo hevelep pal, kentañ penn. Hag anat eo d'an holl, pe evel-se e rankfe bezañ a-c'hoel, ne c'hell an daremprederezh etre broadoù, koulz hag etre prevezidi, bezañ renket dre nerzh an armoù; diwar reizhenn ar furnez eo e tle mont, eleze diwar reizhenn ar wirionez, ar c'hedemglev hag ar genyoul.

115 C'hoantausat ur pal eo hemañ. Rak piv ne c'hoanta ket e ve diwezhañ da argoll ar brezel hag eve ar peoc'h diogelet ha gwarezet war well?

116 Fonnusoc'h pal n'eus ket, ne vern penaos. Spletus eo ar peoc'h da bep hini, da bep tiegezh, da bep broad, d'an denelezh en he fezh. Kemenn Pius 12 a zo c'hoazh an dason anezhañ en hon skouarn. "Gant ren ar peoc'h, nep koll; diwar vrezel, pep argoll⁶⁰".

117 Ha ni neuze o vezañ Vikel Jezuz Krist, Salver ar bed hag Oberour ar peoc'h, en ur ziavezañ c'hoantoù birvidikañ an denelezh en he fezh ha diwar lusk hon c'halon, gant enkreuz rak mad an holl, e kav dimp ez eo hon dlead aspediñ an holl dud, al levierion pergen da ren o holl strivoù diouzh kas an darvoudoù e reizh gant ar poell hag an denelezh.

118 D'ar bodadennoù uhelañ ha barrekañ eo peurstudiañ ur c'hempouez etrevroadel danek-mat, soliet war ar genfizianañs, al lealded en diplomatezh, ar wirionded doujus d'an divizoù. Dav imboure'h diouzh sevel ul loc'hvan ma vo kevraouet emglevioù diarguz, padus hag emsavus diwarnañ.

119 Ha ni, evit hon c'heloù, a bedo dizehan bennozhioù Doue war seurt labourioù, dezhe da zougen frouezh a-fonn.

Daremprederezh er rezid

- 120 Dav d'an daremprederezh etrevroadel doujañ d'ar rezid. Gant hevelep pennaenn ez eo berzet ouzhar broadoù emellout e greadoù diabarzh ar re all hag ivez pep gwaskerezh en o c'heñver. E kontrol emañ gwellaat d'ar re all emskiantañ ouzh o dleadoù, ouzh o itrikoù talvoudus ha reiñ dezhe harp en o erlusk davit o enraokaat e pep keñver.
- 121 Un hevelepted dre andon, dre zaepren, dre finvez zo d'an holl dud gwitibunan ouzh o gervel da vezañ an unan an hevelep tilu kristen. Diwar-se ez erbedemp en hon c'helic'hlizher Pacem in Terris d'ar broadoù pinvidikañ harpañ e kement stumm zo ar broadoù war zierr-en⁶¹.
- 122 Un drugar eo dimp gwelout an degemer ledan a zo graet d'hon galv. Spi zo ganimp e vo roet brasoc'h tro dezhañ c'hoazh ma'z enraokay ar c'hentañ ar gwellañ da armerzh ar broioù paourañ, evite da erluskañ betek ur vuhez denel derentoc'h.
- 123 Un dra zo c'hoazh a rankomp daspouezañ taer warnañ Arabat moustrañ tamm ebet war emreded ar pobloù -se e-ser o skozellañ. En eskemm eo reiñ tro dezhe d' en em gavout evel oberourien ha pennatebeion d'o enraog armerzhel ha kedvuhezal.
- 124 Homañ eo kentel hon Diarnogour Pius 12 : " Urzh nevez an traou, soliet war an divezegezh, a verz e ve gwallet rezid, kevanroez ha diogelroez ar broioù all, ne vern pe vent a ve d'o ziriegezh ha pe nerzh d' o emwarez. Ar riezoù brasoc'h a-dra-sur, pa'z eo fonnusoc'h o araezioù, a zifer peurliesañ dezvadoù an uniezhoù armerzhel a savont gant riezoù bihanoc'h. En o gwir emaint, an eil re koulz evel ar re all, e-sigur

ar c'henvad, da venel emren evit o folitikerezh pe neptu e-doug arvelloù etrevroadel, koulz ha da ziwall kreskadur o armerzh. Diwar hevelep amplegadoù e c'hellfont kenober a-benn kenvad an denelezh ha diogellaat erlusk danvezal ha speredel o fobl⁶².

- 125 Endra harpont e kement stumm zo holl ar broioù paouroc'h, e rank ar stadoù diorreetoc'h o armerzh anzav ha doujañ talvoudoù divezel ha dibarderioù ar re-se ha na vennadiñ e nep doare mestroniañ warne. Setu penaos e c'hellont "kenwellaat a-galz da sevel ur gumuniezh-ved a vo pep ezel anezhi emskiantek ouzh e zleadoù evel ouzh e wirioù hag o strivañ par-ouzh-par evit kenvad an holl⁶³".

Ar peoc'h kenyoulet

- 126 Start ouzh start eo bremañ e-touesk an dud ar gredenn ne zle ket an arvelloù degouezhus etre ar pobloù bezañ diskoulmet dre an armoù, met dre gevrouñ.
- 127 Gwir eo e sav d'al liesañ hevelep kredenn diouzh ar spouron rak pulluc'h nerzhus an armoù a-vremañ ha rak ar gourvestoù hag ar gwastadegoù euzhus a zeufe gante. Ac'hann e vez dibocell d'an den soñjal e vije c'hoazh ar brezel gwellañ tu da zisgwellañ o wirioù en hon oadvezh atemel.
- 128 Dindan o spont e vez ar pobloù, siwazh, hag eñ koulskoude ouzh o ren da zioueriñ bernioù ar o'hant gant ar velladurezh. Ha n'eo ket diouzh argadiñ e reont se, war o lavar - abeg ebet dimp da ziskrediñ warne - hogen evit dibennadiñ ar re all da argadiñ.
- 129 Spi zo da gavout evelato e kavadenno ar pobloù, diwar vrasaat o daremprederezh hag o eskemmerezh liammoù denel d'o unaniñ; hag e vezfont ez eo unan eus

bondleadoù o c'humuniozh naturel diazezañ an darempredoù etre tud evel etre broioù war ar gengarantez ha neket war ar spont. Perzh ar garantez end-eeun eo degas an dud d'ober kenlabour gwirion, o reiñ tro da stummoù lies ha da vadoù diniver.

I V

Urzhindur ar gumuniozh-ved

130 Gwelladennoù diwezhañ ar skiantoù hag ar c'halyezerezh, diwar o delanv pouezus war an dud, o deus int troet, razh dre ar bed, da erluskañ o c'henober ha da gadarnaat o omglev. Gwell-gresket eo bremañ eskemm ar madoù hag ar mennozioù hag ivez an treuztiriañ. Paotoc'h eo an darempredoù etre keodedourion, tiegezhioù ha korfoù-etre e kement bro zo holl, hag ivez ar c'hengejañ etre levierion ar Stadoù. Kenstag eo armerzh ur vro ouzh hini ar re all; war fetisaat ez a an ere etre an armerzhioù broadel, ma'z eont d' ober parzh kevaniat d'un armerzh-bed nemetañ. Kenunanet eo pep kumuniozh politikel gant ar re all, dre an enraog kedvuhez, an urzh, ar warez hag an diogelroez.

131 Dre-se eo anat n'eo ket gouest ken ur vro enhec'h unan da vastañ d'hec'h ezhommoù na da vont war greskiñ evel ma tere. Devoudad ha devouder eus enraog ha gwelladurezh ar re all eo enraog ha gwelladurezh pep broad.

132 A-viskoazh eo bet unvan tilu an denselezh, graet ha ma'z eo gant tud kevatal o bri-natur. Hag e raent evitañ, muiañ ma c'hellent, dre zaremprederezh standur o c'hannadourion pe, en ur bazenn uheloc'h, dre zezvadurioù a-seurt gant ar c'hengradoù hag ar feurioù: hentennoù hag argerzhioù diouzh ar gwir naturel, gwir an dud pe gwir etrevroadel.

134 En deiz a hiziv, ez eus c'hoarvezet kemmoù meur en daremprediñ etrevroadel. Diouzh un tu, e sav diwar ar c'henvad kudennoù grevus-meurbet ha tenn a ranker diskoulmañ decuat, dreist-holl pa vez keal eus diogelroez hag eus peoc'h ar bed. Diouzh un tu all, e-keñver ar gwir, emañ kevatal holl c'halloudoù foran ar c'humuniozhioù politikel; kaer o defe liesnat o c'hendaeloù hag o imboure'h diouzh savelañ binvioù reizhel azasoc'h, ne dizhont ket dirouestlañ ervat o c'hudennoù, evit kelo. N'eo ket ne spirfe ket o youl vat hag o intrudu, met dre ma tiouer d'o beli barreg-ezh leun.

135 Er saviad denel a-vremañ, e chom skort frammadur hag arc'hwel ar Stadoù koulz ha beli ar gournamantoù, evit erluskañ evel ma tere kenvad an holl.

136 Gant sellout ervat, ez eus ur c'heñver a - bouez etre ar c'henvad ha frammadur hag arc'hwel ar galloudoù foran. An urzh divezel, homañ oc'h amplegañ un aotrouniezh foran da erluskañ ar c'henvad er gevredigezh, a c'houlenn ivez m'he devo hevelep aotrouniezh an araezioù ret dezhi. Diwar-henn e rank organoù ar Stad m'emañ ar vali o vevañ, o werediñ hag o finveziñ kaout stumm ha gwerc'h en doare da seveniñ ar c'henvad gant kavout an hentennoù hag an doareoù nevez azasaet ouzh kendro ar gedvuhez.

137 Hiziv an deiz, e sav gant ar c'henvad kudennoù a-vent gant an hollved. Ne c'hellent bezañ dirouestlet nemet gant un aotrouniezh foran a-vent gant ar bed ivez he beli, he frammadur hag hec'h araezioù, o werediñ dre ar bed-holl. An urzh divezel eo a amleg un aotrouniezh foran oc'h ober beli gant an hollved.

138 Hevelep ensavadur hollvedel, dezhañ beli war ar bed a-bezh ha gantañ araezioù gwerc'h da vastañ d'ar

c'henvad, zo da vezañ struzhet war-bouez kedemglev ha neket dre nerzh. Dre ma rank hevelep aotrouniezh embreger gant berzh hec'h arc'hwel; dav dezhi ivez bezañ diuntu a-grenn, estren d'ar spered a gostezenn, ha doujus da arc'hadurioù ergorel ar c'henvad. Mar befe ensavet dre nerzh gant ar riezoù kreñvañ, e trofe seurt aotrouniezh dreist-riezel pe hollvedel dindan gwazoniezh al lazoù prevez pe a-du gant broad pe broad, hon eus aon; ken na ve en argoll talvoudha gwerch hec'h obererezh. Goude d'ar c'humuniezhoù politikel bezañ digemblac'h dre o barr armerzhel hag o bellaveiñ, e chomont gwiridik e-sigur kevatalded o gwir hag o bri divezel. Abeg o deus neuze ar c'humuniezhoù broadel da blegañ enep o grad d'ur veli lakaet dezhe dre nerzh, pe ensavet en diemell anezhe, pe n'o dije ket darbennet e pep frankiz.

139 Koulz pe muioc'h eget kenvad nep riez, e rankkenvad ar bed bezañ termenet e dave d'an den. Rak-se o deus galloudoù foran ar gumuniezhezh vedel da gemer da bal pennañ anzav, doujañ, gwareziñ ha kreskiñ gwirioù mab-den. Ar pezh a c'hellont da c'hounit dre o emell eeun, mar bez, pe dre grouiñ war ar bed saviadoù o wellaat da embregerezh ar gouarnamantoù stadel.

140 E diabarzh pep riez emañ an daremprederezh etre ar galloud foran hag ar geodedourion, an tiegezhioù hag ar c'horfoù-etre da vezañ renet ha kempouezet dre bennaenn ar gouezadoù. Reizh eo e ve hevelep pennaenn o ren war an darempredoù etre an aotrouniezh vedel hag ar gouarnamantoù stadel. E roll an aotrouniezh vedel emañ studiañ ha diskoulmañ kudennoù ar c'henvad e-sigur armerzh, kevredigezh, politikerezh ha stuzegezh. Re gemplezh, re ec'hon, ha re vallus eo seurt kudennoù evit bezañ dirouestlet ervat gant ar gouarnamantoù

stadel.

141 Aotrouniezh ar gumuniezhezh - ved n'emañ ket en he c'herz deherzel obererezh pep Stad en he stern, nag en em erlec'hiañ outi. En he dlead eo strivañ da grouiñ saviadoù o wellaat da bep gouarnamant, da bep den, da bep korf-etre ober o c'hefridi, seveniñ o dleadoù hag embreger o gwirioù, er brasañ diogelroez.

142 D'an 26 mezheven 1945, anat d'an holl, ez eo bet savet Aozadur ar Riezoù Unanet (U.N.O.) ma voe staget outañ a-c'houdevezh ensavadurioù etre-riezel, kefridiet war obererezhioù ec'hon a vent etrevroadel, e-sigur armerzh, kevredigezh, stuzegezh, kelenn ha yec'hed. Pennañ roll an U.N.O. eo' stabilaat ha startant ar peoc'h etre ar bobloù, erluskañ ha gwellaat an darempredoù karadek etreze, soliet war bennaenn ar gevarzhelezh, ar gendoujañs hag ar c'henlabour a-fonn e pep parzh eus obererezh mab-den.

143 Pennañ ober an U.N.O. eo bet an Disklêriadur bedel war Gwirioù an Den, darbennet d'an 10 kerzu 1948, gant Bodadeg-Veur ar Riezoù Unanet. En e vonlavar ez eo spizet evel kenbal d'an holl bobloù ha d'an holl broadoù anzav ha doujañ ent werc'hek pep gwir ha pep frankiz ezrevellet en Disklêriadur.

144 N'omp ket hep gouzout ez eus ennañ krefen nagennet pe daelet gant gwirabeg. Padal, e lakaomp an Disklêriadur-mañ evel ur gammed war-raok etrezek aozidigezh gwirioniel politikel ar gumuniezhezh-ved. Gant ton ez anzav e vri da bep den a zo holl, e tiogel evit pep hini ar gwir da arglask e pep frankiz ar wirionezh, da heuliañ sturieroù an divezegezh, da seveniñ dleadoù ar reizhded, da arc'hañ saviadoù buhez azas ouzh bri mab-den, ha reoù all c'hoazh stag oute.

145 C'hoantaat a reomp start ma vo mui ouzh mui an U.N.O. evit azasaat e frammadur hag e araezioù ouzh ar gefridi hael ha divent fiziet emañ. Salv ma teuy fonnus ar mare ma c'hello an Aozadur-mañ gwareziñ ent werc'hek gwirioù mab-den, hag int dinaouet end eeun eus hon bri-natur a zo evit-se hollel, disgwall-us ha dilamatus. Birvidikoc'h eo hevelep het pa vez an dud mui ouzh mui perzhiaded e buhez foran o bro, pa zamantont gwell ouzh gwell da gudennoù ar bed, ha pa emouezont bliv ouzh bliv ouzh o ferzh a izili bev eus tilu bedel an dud.

V

Sturiadurezh pastorel

Perzhiañ er vuhez foran

146 Goulenn a reomp adarre digant hon Mibion perzhiañ oberiant e mererezh an traou foran ha strivañ da erluskañ kenved an denelezh ha hini o bro dezhe. Ouzh sklêrijenn o feiz ha paol o c'harantez, e lakafont o freder evit na vo ket sparlet an dud gant an ensavadurioù e-sigur armerzh, kevredigezh, stuzegezh ha politikerezh; kentoc'h avat ma vefont skoret gante da wellaat da vab-den koulz en e natur koulz en e zrestnatur.

147 Evit ma vo intret ar sevenadur gant pennsturioù yac'h ha pennaennoù kristen, ne spiro ket d'hon Mibion korvoiñ sklêrijenn ar feiz na mont a-youl-verbavit erluskañ ar c'henvad; dav dezhe c'hoazh perzhiañ a-zevri en ensavadurioù ar gevredigezh ha delanviñ a-ziabarzh war ar frammadurioù.

148 Ar sevenadurezh vramanel avat zo azonet peurgetket gant gounezadurioù ar Skiant hag ar c'halvezer-

ezh. N'eus ket a wered war an ensavadurioù hep gouziadur, ha kalvezerezh azas ha gouestoni micherel.

149 Hevelep perzhioù ne spiront ket, dav henn merzhout, evit denekaat diouzh ar gwellañ darempredoù ar vuhez pemdeziek, pa rank ar wirionez bezañ ha sol, ar reizhded he stur, ar garantez he c'heflusker, hag ar rezid he hin.

150 A-barzh tizhout hevelep pal, e tle an dud lakeat o freder: kentañ, en amrealioù douarel, da virout al lezennoù azas ouzh pep obererezh ha da zegemeran hentenoù dioute; da c'houde, da reizhañ o embregerezh diouzh reolennoù an divezegezh ha da ren o buhez evel tud oc'h embreger o gwirioù hag o seveniñ o dleadoù. Erziwezh ez eo ren o amreal evel un silger da c'hourc'hemennoù Doue, evel ur c'henlabour gant e grouerezh hag evel ur genlodenn gant steuñverezh E Ragevezh en istor. Gant-se ez eo ampleget lakaat e striv gouizial kalvezel ha licherel ken-ha-ken da glotañ gant madoù dreist ar spered⁶⁴.

151 Anat eo emañ en o bleuñv araokadennoù ar skiantoù hag ar c'halvezerezh, e-metou ar broioù kristen o hengoun a-werz zo, ha ne zifonn ket gante an araezioù diouzh seveniñ ar pezh a c'hoantaer; dister avat e vez a-lies an awen hag ar goell kristen en o mesk.

152 Gant gwir abeg e klasker penn da seurt divigad. A-drugarez da dud oc'h anzav o c'hristenelezh hag o reizhañ o buhez evit un darn ac'hoel war gemenoù an Aviel, ez eo diazezet, evit ar muinañ, hevelep reizhadurezh. Pa n'emañ ket o ober e kenglot gant o feiz, e tegouezh seurt gwall. Dav dezhe neuze danzen unded o meiz hag o greadoù, ma vezo intret o embregerezh gant gouloù ar feiz ha nerzh ar garantez.

153 Mar bez disklot etre feiz ar gristenion hag o doareoù-ober, e teu, a gav d'imp, diouzh ar skort ma'z eo o anaoudegezh war ar gelennadurezh hag an divez - ouriezh kristen. Paot eo an digempouez etre ar studioù kravezel hag an deskamant foran, hemañ o vont betek an derez uhelañ endra van ar re-se war ul live elfennel. Redius eo ren kelennadurezh kristen ar yaouankizoù o seurt doare ma vo klok ha kendalc'hel ha ma vo an anaoudegezh kalvezel hag an divezegezh speredel a-rez gant ar gouziadurioù hag ar c'halvezadurioù bepred war greskiñ. Rankout a reer ivez stummañ ar re yaouank diouzh ma talc'ho pep hini e garg da zont ev-el ma tere⁶⁵.

154 Amañ eo evezhiañ pegen start e vez meizañ ar gwir geñver etre an devoùoù hag amlegadoù ar reizhded, eleze savelañ ervat e pe stumm hag e pe zerez dedalvout pennaennoù ha sturiennoù ar gelennadurezh er sav-iaid a-vremañ.

155 Seul startoc'h eo en deiz a hiziv ma rank pep un-an ren e amreal evit ar c'henvad hollel, ha pep tra o vont prim war brim en-dro. Bemdez eo imbroudañ da azasaat devoùoù ar gedvuhez ouzh amlegadoù ar reizhded; diwar-henn eo arabat d'hon Mibion soñjal e ve o gwir astaliñ gant an hent graet.

156 Ne vern penaos ez eo kentoc'h d'an dud dre vras anzav displestused kement o devo graet betek - henn. Oberoù brasoc'h hag emsavoc'h o deus da seveniñ bemdez e parzhioù liesseurt: kevredadoù-kenderc'hañ, c'hweluniadoù, unaniezhoù micherel, gwazadurioù ked-skor, aozadurioù sevenadurel, oberoù reizhoniel ha politikel, skor yec'hedel, embregerezh korfel haheñveleurtiezh. Aze emañ youladennoù hon remziad hag int gant imboure'h an atom ha kentañ ergerzhioù an oabl,

o tigeriñ hentoù nevez-flamm, koulz didermen o diweladoù.

Kenlabour etre katoliked ha nann-katoliked

157 Ar pennaennoù hon eus dewelet amañ a gav o sol e redi-natur an denelezh hag a zo an aliesañ diouzh domani ar gwir naturel. Evit embreger hevelep pennaennoù ez eus kenlabour stank a-berzh ar gatoliked gant kristenion distag diouzh ar Sez abostolek, pe gant tud diank dezhe ar feiz kristen hag int neozh sklêrijennet gant ar poell, o chom stag ouzh an divezegezh natur. "D'ar gatoliked eo neuze chom atav reizhek gante e-unan ha na zegemer treuzvarc'had ebet a ve noazus ouzh kevanded o c'hravez ha glanded o divezegezh. Padal, arabat dezhe ober diouzh o lazou-int hepken, o kenober a wir galon e pep tra mat dre natur pe o kas d'ar mad⁶⁶".

158 Reizh-mat eo diforc'hañ bep tro ar c'hamober diouzh ar c'hamoberer, ha pa ve unan direizh e vennadoù pe skort e anaoudegezh e-keñver kravez pe divezegezh. O'hoazh mar bez faziek e chom un den, dezhañ bri disgwallet ha doujañs dleet. En e c'halloud e vez bepred mont diouzh ar c'hamober ha klask e hent davit ar wirionez. Kammed ne ra diouer dezhañ Regevezh Doue d'e harpañ. Hennezh neuze, hag eñ hiziv diank eus gouloù ar feiz pe direizhet dre fazi, a c'hell arc'hoazh, gant sklêrijenn Doue, englenañ ouzh ar wirionez. Mar deu d'ar feizidi, diwar abegoù foran, daremprediñ gant tud difeiz dre fazi pe diglok o feiz e c'hell bezañ un dro pe ur broud da zeren ar re-mañ davet ar wirionez.

159 Arabat ivez hevelebekaat damkaniezhoù brizh a-berzh prederourion war anien, andon ha finvez ar bed

hag an den ouzh luskoù istorel o tennañ d'an armerzh, d'ar gevredigezh, d'ar stuzegezh ha d'ar politikerezh - ha pa ve d'ar re-se o orin hag o awen en damkaniezhoù-hont. Digemm-kaer eo un damkaniezh, ur wezh termenet ha diazezet da vat; al luskoù avat, dre ma tremont ouzh saviadoù war gemm ne c'hellont ket na vezañ levezonet don gant ar re-mañ. Kement rak-se, pa vez hevelep luskoù azas ouzh pennaonoù ar skiant-pocell hag oc'h ober diouzh youladenoù reizh an den, piv na c'hellfe ket anzav an elfennoù pocellek ha dar-bennus a gasont gante?

160 Setu perak, goude da emgejoù zo bezañ kavet dizere pe goulle betek-henn war an dachenn bleustrek, e c'hellont bezañ spletus-kaer bremañ pe tonket da vezañ. Evit gouzout avat ha deuet eo ar c'houlz pe get, pe diferañ modelezhioù ha feur ar c'henstrivadoù davit ken vad an holl e parzh an armerzh, ar gevredigezh, ar stuzegezh hag ar politikerezh, n'eur ket evit henn ober nemet gant furnez, ha hi reolierez kement vertuz o reizhañ ar vuhez kevredigezhel ha personel. Evit keloù ar gatoliked, emañ an disentez diouzh se da vezañ roet gant tud pouezusañ ar gevredigezh ha barr-ekañ war an dachenn, gant ma vent felseun ouzh kelenn kevredhel an Iliz ha ma sentfent ouzh ar pennadurezhioù anezhi. Kounant zo amañ d'ober n'emañ ket gwirioù ha dleadoù an Iliz bonnet gant gwareziñ kevanded ar gelennadurezh e-sigur feiz ha divezegezh; en he beli emañ ivez plodiñ gant he Mibion war an dachenn foran pa vez keal da ziferañ penaos lakaat ar gelennadurezh-se da dalvezout ⁶⁷.

161 Tud kalonek zo, ne c'hwit ket, gredus ha p'en em gavont gant saviadoù pell pe pellik diouzh ar reizhded da embreger kemman pep tra ken na hañval o deltu

birvidik ouzh ur meni dispac'h.

162 Dezhe e vennomp degas da Goun ez eo an erlusk lezenn pep buhez; an ensavadurioù denel ivez, anez mont dezhe plaen dre an diabarzh, ne c'hell ket bezañ gwellaet oute. Henezh eo gouzav hon Diaraogour Pius 12: "N'eo ket an dirollerezh a c'hell da zegas silvidigezh ha reizhded, met ur c'hweldro dre vrav. Rak diskar atav eo labour an diroll, hep kammed sevel netra; kefreviñ ar gwall-youloù, hep morse distanañ dezhe. Hag eñ o c'henek kas ha freuz, pell diouzhken-vreurekaat an dud hag ar strolladoù, en o redi da ad-sevel gorrek, da heul poanioù spontus, war an dismantrou hadet gant o broc'hadeg ⁶⁸".

Ar Peoc'h:kefridi d'an holl dud a youl vat

163 D'an holl dud a youl vat ez eus hiziv ur gefridi divent, a zo adsoliañ kengejoù ar gedvuhez war ar wirionez, ar reizhded, ar gengarantez hag ar rezid, etre an dud dre hini, etre ar geodedourion hag o Stad etre ar Stadoù dre hini, etre an dud, an tiegezhioù, ar c'horfoù-etre hag ar Stad diouzh un tu, hag ar gumuniezh-ved diouzh an tu all. Uhelat ur gefridi honnezh, pa'z eo lakaat da ren ar gwir beoc'h, diouzh an Urzh savelet gant Doue.

164 Bihan-niver eo hevelep tud, a-dra-sur, burzhudus avat o dellid e-keñver an denelezh, ha dle eo dimp ober gourc'hemenoù meulus dezhe a-ouez d'an holl. War un dro en o fedomp da wellaet da gen salvus un obererezh. Fiziañs hon eus e teuy gante reoù all a-vostadoù, feizidi pergen, lusket gant ar garantez ha gant skiant o dlead. Pep feizad er bed a hiziv, zo da vezañ ur fulenn lugernus, ur mager karantez hag ur goell evit ar yoc'h. Seul stakoc'h e vo ouzh Doue, seul

welloc'h e ober.

165 Ar gwir beoc'h ne oufe ren gant an dud ma n'emañ da gentañ e pep hini anezhe, ma ne vez reizhet e pep unan an urzh mennet gant Doue. "Hag e venn da ene trec'hiñ war da wall-youloù? a aters sant Eostin. Ra blego d'an Hini e barr an uhel hag e vo faezhet ar pezh a zo e traoñ an izel. Hag ennout e vezo ar peodh gwirion, diarvar, peururzhiek. Pe urzh zo war seurt peoc'h? Doue o kemenn d'an ene ha d'ar c'horf: seurt ebet urzhietoc'h⁶⁹".

Dre Jezuz Krist, Priñs ar Peoc'h

166 Ar c'helenn hon eus diavaezet war ar c'hudemoù o nec'hiñ an denelezh, pa'z int ken start liammet ouzh enraog ar gevredigezh, zo deuet dimp dre ar c'hoant a genlodomp, anat, gant an holl dud a youl vat: gwelout oc'h anezañ ar Peoc'h war ar bed.

167 Ha ni, daoust d'hon dizellid, kefridiet da Vikel an Hini en deus an diouganer anvet "Priñs ar Peoc'h"⁷⁰, e sellomp evel un dlead dimp gouestlañ hon preder hag hon nerzh da erluskañ kenvad an holl. Ar peoc'h avat a ve ur ger goullo ma ne vez soliet war an urzh hon eus brasdiferet, gant ar brasañ goanag, a-hed ar c'helc'hlizher-mañ; un urzh soliet war ar wirionez, struzhet diouzh ar reizhdad, bevaet ha klokaet gant ar gengarantez hag oberiet er rezid.

168 Ken barruhel ha ken meur eo hevelep embregerezh ma ne c'hell ket bezañ sevenet gant un den dre e holl nerzhoù, pegen dreist bennak e ve e wellañ youl vat. Evit d'ar gevredigezh melezcourañ pervezh skeudenn Rouantelezh Doue, e rank kaout harp digant an Neñv.

169 Rak-se, en deizioù santel-mañ, e sav gredusoc'h

hon pedenn ouzh an Hini en deus, dre E c'houzañ kriz hag E varv, trec'het war ar pec'hed, kentañ mammenn d'hon dizunvaniezh, d'hon reuzidigezh ha d'hon dir-eizhderioù, hag En deus dre E wad adunvanet an denelezh gant E dad eus an neñv. "Rak Eñ eo hon Peoc'h an Hini en deus graet unan eus daou (). Hag e teuas hag e prezegas ar Peoc'h, deoc'h-c'hwi pell, koulz ha d'ar re diwar-dro⁷¹".

170 Sed an arroud a glevomp gant liderezh an deizioù santel-mañ: "Deuet Jezuz hon Aotrou en e sav e-kreiz E ziskibion, e lavaras: Ar Peoc'h ganeoc'h, alleluia. Ouzh gwel an Aotrou, e reas levez an diskibion.⁷²" Ar C'hrist en deus degaset dimp ar peoc'h, lezet dimp ar peoc'h. "Ar Peoc'h a laoskan ganeoc'h, va feoc'h-me a roan deoc'h; neket evel m'en ro ar bed, en en roan deoc'h⁷³".

171 Hevelep Peoc'h neuze, degaset gant hon Dasprener a c'houlennomp digantañ en hon pedemnoù. Argaset-Eñ diouzh hon eneoù kement a c'hell lakaat ar peoc'h en argoll; kemmet an holl e testoù d'ar wirionez, d'ar reizhdad ha d'ar garantez kenvreurek. Sklêrijennet levierion ar pobloù ma lakafont o freder gant stadvat o c'henvroiz ha ma strivfont da savelañ rovezh dreist ar peoc'h. Entanet ar C'hrist kalonoù an holl ma vo bannet kuit ar c'haelioù disrannus, ma vo kadarnet liammoù o c'hengarantez, ma vo klevet war well ouzh o hentez, ha ma vo trugarezet d'an neb o dismeg. Ma teuy enta holl dud ar bed d'ober kenetreze ur wir gumuniezh kenvreurek ha ma vleunio ha ma reno diastal ar peoc'h hollyoulet.

172 Evit ma vo astennet hevelep peoc'h war an holl gre en ho preder ha peurgetket war ar rumadoù izel-

añ o deus ezhomm eus skoazell ha gwarez arbennik, e roomp a greiz kalon en Aotrou Bennozh an Abostol war-noc'h, Breudeur Vriël, war ar veleion hag ar reizhidi war al leaned hag al leanezed ha war an holl feizidi, peurgatket war ar re a selaouo gant ar brasañ gred ouzh hon erbed.

D'an holl dud a youl vat a gasomp dezhe hon Lizeer-mañ, e c'houlenomp digant an Uhel-dreist daskor eürusted ha finbortez.

173 Roet e Roma, war dreuzoù Sant-Pêr, d'ar Yaou Gamblid, 11 ebrel er bloavezh 1963, pempet hini hon Pennvelegiezh.

YANN XXIII, PAB.

NOTENNOU

1. Ps. 8, 1.
2. Ps. 103, 24.
3. kv. Gen. 1, 26.
4. Ps. 8, 5-6.
5. Rom. 2, 15.
6. kv. Sl. 18, 8-11.
7. kv. Pius XII, kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1942, AAS, 1943, p. 9-24; ha Yann XXIII, prezegenn, roet d'ar 4 genver 1963, AAS LV, 1963, p. 89-91.
8. kv. Pius XII, kelc'hlizher Divini Redemptoris, AAS XXIX, 1937, p. 78; ha Pius XII, kemenn skingomzet, deiz ar Pantekost, 1^{añ} mezheven 1941, AAS XXXIII 1941, p. 195-205.
9. kv. Pius XII, kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1942, AAS, XXXV, 1943, p. 9-24.
10. Diuinae Institutiones, lib. IV, c. 28, 28, 2; PL. 6, 535.
11. Kelc'hlizher Libertas praestantissimum, Acta Leonis XIII, 8, 1888, p. 237-238.
12. kv. Pius XII, kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1942, AAS, XXXV, 1943, p. 9-24.
13. kv. Pius XI, kelc'hlizher Casti Connubii, AAS XXII 1930, p. 539-592; ha Pius XII, kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg, 1942, AAS XXXV, 1943, p. 9-24.
14. kv. Pius XII, kemenn skingomzet, derc'hent Pantekost, 1^{añ} mezheven 1941, AAS, XXXIII, 1941, p. 201.
15. kv. Leo XIII, kelc'hlizher Rerum Nouarum, Acta Leonis XIII, XI, 1891, p. 128-129.
16. kv. Yann XXIII, kelc'hlizher Mater et Magistra, AAS, LIII, 1961, p. 422.
17. kv. kemenn skingomzet, deiz ar Pantekost, 1^{añ} mezheven 1941, AAS, XXXIII, 1941, p. 201.
18. Kelc'hlizher Mater et Magistra, AAS, LIII, p. 428.
19. kv. Ibid., p. 430.
20. kv. Leo XIII, kelc'hlizher Rerum Nouarum, Acta Le-

onis XIII, XI, 1891, p. 134-142; Pius XI, kelc'hlizher Quadragesimo Anno, AAS, XXIII, 1931, p. 199-200; ha Pius XII, lizher Sertum laetitiae, AAS, XXXI, 1939, p. 635-644.

21. kv. AAS, LIII, 1961, p. 430.
22. kv. Pius XII, kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1952, AAS, XLV, 1953, p. 33-46.
23. kv. Kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1944, AAS, XXXVII, 1945, p. 12.
24. kv. kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1942, AAS, XXXV, 1943, p. 21.
25. Eph. 4, 25.
26. kv. Pius XII, kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1942, AAS, XXXV, 1943, p. 14.
27. Summa Theol., Ia-IIae, q. 19, a. 4; kv. a. 9.
28. Rom. 13, 1-6.
29. Patrol. Graeca, 60, 615, War al lizher d'ar Romaned, c. 13, gw. 1-2, homil. XXIII.
30. Leo XIII, kelc'hlizher Jmmortale Dei, Acta Leonis XIII, V, 1885, p. 120.
31. kv. Kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1944, AAS, XXXVII, 1945, p. 15.
32. kv. Leo XIII, kelc'hlizher Diuturnum illud, Acta Leonis XIII, II, 1881, p. 274.
33. kv. Ibid., p. 278; ha c'hoazh Leo XIII, kelc'hlizher Jmmortale Dei, Acta Leonis XIII, V, 1885, p. 130.
34. Oberou, 5, 29.
35. Summa Theol., Ia-IIae, q. 93, a. 3 ad 2um; kv. Pius XII, kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1944, AAS, XXXVII, 1945, p. 5-23.
36. kv. Leo XIII, kelc'hlizher Diuturnum illud, Acta Leonis XIII, II, 1881, p. 271-272; ha Pius XII, kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1944, AAS, XXXVII, 1945, p. 5-23.
37. kv. Pius XII, kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1942, AAS, XXXV, 1943, p. 13; ha Leo XIII, kelc'hlizher Jmmortale Dei, Acta Leonis XIII, V, 1885, p. 120.
38. kv. Pius XII, kelc'hlizher Summi Pontificatus, AAS, XXXI, 1939, p. 412-413.
39. kv. Pius XII, kelc'hlizher Mit brennender Sorge, AAS, XXIX, 1937, p. 159; ha kelc'hlizher Divini Redemptoris, AAS, XXIX, 1937, p. 65-106.
40. Kelc'hlizher Jmmortale Dei, Acta Leonis XIII, V, 1885, p. 121.
41. kv. Leo XIII, kelc'hlizher Rerum Nouarum, Acta Leonis XIII, XI, 1891, p. 133-134.
42. kv. Pius XII, kelc'hlizher Summi Pontificatus, AAS, XXXI, 1939, p. 433.
43. AAS, LIII, 1961, p. 19.
44. kv. Pius XI, kelc'hlizher Quadragesimo Anno, AAS, XXIII, 1931, p. 215.
45. kv. Pius XII, kemenn skingomzet, dez ar Pantekost, 1^{er} mezheven 1941, AAS, XXXIII, 1941, p. 200.
46. kv. Pius XI, kelc'hlizher Mit brennender Sorge, AAS, XXIX, 1937, p. 159; ha kelc'hlizher Divini Redemptoris, AAS, XXIX, 1937, p. 79; ha Pius XII, kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1942, AAS, XXXV, 1943, p. 9-24.
47. kv. Pius XI, kelc'hlizher Divini Redemptoris, AAS, XXIX, 1937, p. 81; ha Pius XII, kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1942, AAS, XXXV, 1943, p. 21.
48. Yann XXIII, kelc'hlizher Mater et Magistra, AAS, LIII, 1961, p. 415.
49. kv. Pius XII, kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1942, AAS, XXXV, 1943, p. 21.
50. kv. Pius XII, kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1944, AAS, XXXVII, 1945, p. 15-16.
51. kv. Pius XII, kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1942, AAS, XXXV, 1943, p. 12.
52. kv. Leo XIII, lizher abostolek Annum Ingressi, Acta Leonis XIII, XXII, 1902-1903, p. 52-80.
53. Furnez 6, 2-4.
54. kv. Pius XII, kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1941, AAS, XXXIV, 1942, p. 16.
55. kv. Pius XII, kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1940, AAS, XXXIII, 1941, p. 5-14. (+)
56. De ciuitate Dei, lib. IV c. 4; PL. 41, 115; kv. Pius XII, kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1939, AAS, XXXII, 1940, p. 5-13.
57. kv. Pius XII, kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1941, AAS, XXXIV, 1942, p. 10-21.
58. kv. Yann XXIII, kelc'hlizher Mater et Magistra, LIII, 1961, p. 439.

59. kv. Kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1941, AAS, XXXIV, 1942, p. 17; ha Benead XV, Annoug da levrierion ar pobloù o vrezeliñ, 1^{añ} eost 1917, AAS 9, 1917, p. 418.

60. kv. Kemenn skingomzet, d'an 24 eost 1939, AAS XXXI, 1939, p. 334.

61. AAS, LIII, 1961, p. 440-441.

62. kv. Kemenn skingomzet, derc'hent Nedeleg 1941, AAS, XXXIV, 1942, p. 16-17.

63. Yann XXIII, kelc'hlizher Mater et Magistra, AAS LIII, 1961, p. 443.

64. kv. Pius XII, Prezegenn da re yaouank an Obererezh katolik eus eskobiezhoù Italia, 12 gwengolo 1948 AAS, XL, p. 412.

65. kv. Yann XXIII, kelc'hlizher Mater et Magistra, AAS, LIII, 1961, p. 454.

66. Ibid., p. 456.

67. Ibid., p. 456; kv. Leo XIII, kelc'hlizher Im-mortale Dei, Acta Leonis XIII, V, 1885, p. 128; Pius XI, kelc'hlizher Ubi Arcano, AAS, XIV, 1922, p. 698; ha Pius XII, Prezegenn ouzh leuriaded Unvaniezh etrevroadel an aozadurioù gwregel katolik, 11 gwengolo 1947, AAS, XXXIX, 1947, p. 486.

68. kv. Prezegenn da vicherourion eus eskobiezhoù Italia, Pantekost 1943, AAS, XXXV, 1943, p. 175.

69. Miscellanea Augustiniana, S. Augustini Sermones post Maurinos reperti, Roma, 1930, p. 633.

70. kv. Is. 9, 6.

71; Eph. 2, 14-17.

72. Bilgeriad ar Pellgent d'ar Gwener goude Pask.

73. Jo. 14, 27.

⁺55. Kammgomer er vouladenn gefridiel; emañ an arroud diouzh Pius XII, Prezegenn Nedeleg 1940 dirak ar Gardinaled.



Koumanant 12 niverenn.45 FF.

Koumanant d'ar Geriadur Istorel
hepken (4 niverenn).....15 FF.

Koumanant hep ar Geriadur Istorel (8 niverenn)30 FF.

Rener : G. ETIENNE
Embannerez : P. MAZE
sekretouriezh : Preder, 30, Place des Lices, 35- RENNES

An arc'hañt da : M. G.ETIENNE , CCP 16 093 13 , Paris

Trede Trimiziad 1970

Priz ar c'haier-mañ: 5,00 FF.

Moulet gant SADED
CPPP Nm 35.709
Diskleriet hervez lezenn, Trede Trimiziad 1970.



